

Au fol^o 300 recto, seulement le titre :

(300 recto)

Ar vag Kollet

[rien aux fol^o 300 verso et 301 recto.]

(301 verso)

Ar vag Kollet

Krojal ra ar vran ust d'ar Teodet,
Eur gwall-eür benak zo c'hoarvezet!

— Konje ma mam a c'houlenan
Ewid monet da pardonan

Da pardon bras da Landreger
~~Mont 'ra oll tud iaouank ar c'hanter~~
Monet ra (1) ie ma breur mager
hag ar ol dud yaouank deus a ger. (2)

— Ewid d'ar pardon bras na n'heet ket
Eur gwall-eür benak zo c'hoarvezet
Krojal ra er vray ust d'ar Teodet!

Beuet zo eur vagat tud iaouank
Be 'voa heni unek a Kant.

(302 verso)

Muia true moa deus 'hini 'ne
Wa deus eur vreg iaouank wa gante
hag e wa o tougen bugale.

(1). — L'r (de:ra) est écrit en surch. sur un i (d'abord: ia).
(2). — Ce vers est ajouté.

An vrog iaouank a levere
Pa troë er vag war he c'hoste :

— Otrio Sant Matelin Montkontour
Konduktor an arvel hag an dour
Konduktor an dour hag an arvel
Prezervet dime va bujel. (1)
Prezervet din va hinnoçant
Ja da fonç an dour eb badeiant,
ha me ma unan eb Sakramant.

Me raio dec'h eur gouris Koar
hag a reio an dro do douar.

An dro do iliz ha do berret
An dro do oll douar biniget.

Otrio Sant Matelin Montkontour
Konduktor an arvel hag an dour,

(303 verso)

Prezervet din va hinnoçant
Ja da fonç an dour eb badeiant,
ha me ma unan eb Sakramant.

Me raio dec'h eur banniel gwen,
ha seiz kloc'h arc'hant war he ben.

Me raio dec'h eur peç lien skler
hag a c'holois ho seiz oter.

Otrio Sant Matelin Montkontour
Konduktor an arvel hag an dour

Prezervet din va hinnoçant
Ja da fonç an dour eb badeiant
ha me ma unan eb Sakramant.

Me raio dec'h Gverc'hez Vari
Gwela vuoc'h lez a zo em zi,

(304 verso)

Me raio dec'h eur gouris du
hag a vo Sulaouret en daou du.

(1).— Ces deux vers ajoutés dans l'intervalle entre les deux strophes.

Kri vije er galon na voelje
 War od ar Teodet hag ar de Se :

E welet ar mor bras e virvin
 Gant goad ar gristenien e veuin

Kri vije er galon na voelje
 En od ar Teodet nep a vije

O volet eur bugel ganet flam
 A vont da interin gant he (1) vam

En he dornek eur bout bizin glas
 Wit diskoel wa kavet er mor bras

hag eur bout all war voul he galon
 Wit diskoel wa ganet er mor don .

(305 verso)

3

[pas de trad. franç.]

(1). - D'abord : e ; h (de ; he) est écrit en surch. sur cet e : he .